

Laudate Mariam

Diskan :

Laudate, laudate, laudate
Mariam ! (2 wech)

1.

Laudate ! Mamm zantel,
Dreist an oabl skedus
Hor c'halonou fidel
A bigno joaius.

2.

Ra jomot hor Mestrez
Steredenn ar mor.
C'houi 'zo hor Rouanez,
Rouanez Arvor.

3.

D'ar pardaez er grasou
E ti pep Breizad,
Gant Jezuz hon Aotrou
Ho meulomp ervat.

4.

War lein ar menezioù,
Ar pastor denved
War-du holz an nenvou
A lavar hapred.

5.

War e vagig disteñ,
Ar martolod paour
'Lavar d'e Vamm dener,
Gant eur galon acour :

6.

Gant an oad daoubleget
An tad-koz en ti,
Diskabell daoulinet,
N'ehan d'ho pedi.

7.

An élig mailhuñet
En e gavel striz,
Epad ma 'z eo kousket
Ho ped en e c'hiz.

8.

Breiziz, a-vihanik
Betek ar maro,
O c'halon birvidik
Laouen a ganol.

9.

E palez kaer Jezuz
Bodet dizoursi,
Eun deiz ni 'vo eürus
En-dro da Vari.

Kalon dinamm Mari

Diskan : Ave, ave, ave
Maria ! (2 w.)

1.

Kalon dinamm Mari,
Leun a garantez,
Ni 'zeu d'ho saludi
Gant an holl Elez.

2.

Feunteun an holl c'hrasou,
Sellit gant true
Ouz hon holl ezommou
A gorf, a ene.

3.

Betek e Breiz-Izel,
Gwechall brj ar Zent,
Ouz an Iliz santel
Kalz a zo dizent.

4.

Roit d'an den dallet
Gras ar sklerijenn,
D'ar pec'her kaledet
Gras ar binijenn.

5.

En hon tiegeziou
Lakit karantez,
Hag en hor c'halonou
Peoc'h ha levez.

6.

C'houi 'zo Mamm da Jezuz,
Mamm d'ar gristenien,
C'houi 'zo trugarezus
'Vit ar bec'herien.

7.


Stouet omp d'an douar
Dirak ho Kalon,
Gant keuz ha gant glac'har
O c'houlenn pardon.

8.


Ennoc'h hon holl fizians
Epad hor buhe ;
Ennoc'h hon esperans
Er maro ive.

8N1-4-040

PAROISSE
DE NOTRE-DAME DE TRÉMAOUEZAN



PIELERINAGIE DU 30 AVRIL 1944



L'EGLISE. - Vue extérieure

PROGRAMME

15 heures. — Petites Vêpres de la Sainte Vierge.

Cantique à N.-D. de Trémaouézan

Allocution de M. le Chanoine Chapalain, curé de Lambézellec.

Suite du cantique à N.-D. de Trémaouézan

Sub tuum - Litanies

Procession - Cantiques à la Sainte Vierge

Exposition du Très Saint Sacrement

O Salutaris

Une dizaine de chapelet

Invocations

Tantum Ergo

Bénédictio

Cantique à N.-D. de Trémaouézan

N. B. - Pour le chant prière de bien écouter le haut parleur.

AVIS

1. - Le pèlerinage est une station de prières et non un spectacle. Les curieux doivent céder la place aux pèlerins.

2. - Le pèlerinage débutera par le chant des Vêpres suivies de la procession et la Bénédiction du Saint-Sacrement. Ces cérémonies se feront en plein air.

3. - Pendant les Vêpres et la Bénédiction du Saint-Sacrement les processions des diverses paroisses occuperont la place qui leur sera désignée par le service d'ordre et reprendront cette même place au retour de procession.

4. - Pendant la procession seuls les porteurs d'enseignes précéderont l'image de la Vierge et le clergé. La foule suivra le clergé, les hommes en premier lieu.

5. - Emplacements surveillés pour bicyclettes, Vélos hommes chez M. L. Favé Bourg; vélos femmes chez M. F. Jézéquel, Bourg.

KANTIK DA ITRON VARIA AN DRE

War don : Da Feiz hon tadou koz.

Diskan

D'an Itron-Varia, hor Mamm ha Rouanez
Kanomp meuleudiou.
Dan Itron-Varia, patronez hor parrez
Kasomp hor pedennou.
Itron Varia an Dre, ni a zo en enkre
Ouzomp ho pet truez.

I

A-hed ar c'hanvejou, war zouarou hor parrez
Ho peus skuilhet dalc'hmat grasou pinvidik-mor
E kreiz hon ankeniou, hor selaouit, ô Gwerc'hez,
Hag ouz hor pedennou, na sarrit ket ho tor.

II

Betek an iliz gaer, savet aman evidoc'h
Omp diredet hirio, gwasket hor c'halonou,
Selaouit ar bedenn a gasomp betek ennoc'h
Truez, ô Gwerc'hez vat, ouz ho pugalligou

III

Gant ar brezel padus, e kresk bemdez hon anken
Dre m'en em led an tan, a zismantr hor c'heriou.
Evit ar paourkaez tud ha n'o deus mui eul lochenn
Grit ma ehano prim krisder o gwalleuriou.

IV

Pell diouz douarou Breiz, dalc'het en harlu garo,
Kalz euz hor bugale a zoug eur groas poumner ;
Gant samm o zubruilhous, ez int pell 'zo skuiz maro
O Gwerc'hez, roit 'ta, frankiz d'ar prizonnier.

V

E mesk hor yaouankiz, dibabit 'ta ebestel
'Vit hada karantez ha furnez er maeziou
Pa vo doujet Doue hag e lezennoù santel,
C'houi a skuilho warnomp brokus e vennoziou.

VI

Dre eur vuhez santel a feiz hag a binijenn
Diouz pec'hejou ar bed ni roio digoll d'eoc'h
C'houi eo ar wella mamm, selaouit 'ta hor pedenn
Itron Varia 'an Dre, digasit d'comp ar peoc'h.

Imprimerie A. Moënnier, vikel-vras Kemper, 6 meurz 194

Imp. du Léon, Landerneau - S^{ie} 3